

**Al. assertorisch, apodiktisch,
problematisch e poelloniezh Kant**

(GE – 14 08 97)

KANT en deus kenradet an tri zermen-mañ da adanviñ barnadoù a zo ganto ur *vodelezh*, eleze ur gefridi “na gendaol ket da endalc'hed ar barnad, a sell hepken ouzh talvoud an ereenn¹ en he c'heñver gant an devezout dre vras².” A-raok degouezhout gant reizhiad KANT koulskoude e vo mat reiñ un alberz eus hanezadur ar modelezhoù.

Modelezh (Gl. *modalité*, Al. *Modalität*, Sz. *modality*, Kb. *moddolder*, Iw. *módúlacht*) a reer eus doare ur barnad (un erganad, ul lavarenn) hervez ma tezger un haeradenn, ur vartezeadenn, h.a. An div lavarenn : “ Bez' ez eus logod en tí ha “ Marteze ez eus logod en tí a ziskouez un diforc'h etre div vodelezh, etre an haeradenn dezgeriet gant an eil hag ar vartezeadenn dezgeriet gant eben. Ar Boelloniezh klasel, diazezet war rummennoù ARISTOTELES, a zeskrive peder modelezh, kevenebet div ha div : *gallusted* hag *angallusted*, *deberzh* ha *retvez*. Ober a reer *erganadoù model* (Gl. *propositions modales*) eus ar re a laka war wel ar mod ma tere an ardaolad ouzh an divoud. Anezh e rae ar Boelloniezh klasel pevar seurtad diforc'het hervez ma tec'herient kealioù ar *gallus*, an *deberzhek*, an *angallus*, ar *retvezek* ; pep mod a c'halled yaññ pe nac'hañ, ken e tisoc'hed gant eizh seurtad : “gallus eo e ve eus A”, “gallus eo ne ve ket eus A”, h.a. ha zoken gant c'hwezek :

¹ Er Boelloniezh ez eus daou gemeradur da Br. *ereenn*, Gl. *copule*, Al. *Kopula* : a) er ster strizh ez eo ar verb *bout* oc'h eren an ardaolad ouzh an divoud er barnadoù ardaoliñ ; b) er ster hollekaet e reer *ereenn* eus ne vern pe verb o verkañ an *diazalc'h* (Gl. *relation*, Al. *Beziehung*) etre termenoù ne vern pe erganad — er c'hemeradur-mañ ez eo arveret *Kopula* e frazenn KANT.

² “[...] daß sie nichts zum Inhalte des Urteils beiträgt, sondern nur den Wert der Kopula in Beziehung auf das Denken überhaupt angeht” (*Krit. der reinen Vern.*, Transcend. Analyt., I 1 A. 75 ; B. 100).

“gallus eo e ve eus A”, “n'eo ket gallus e ve eus A”, “n'eo ket gallus ne ve ket eus A”, h.a.

KANT a adkemer ar modelezhoù klasel o tiren an diforc'h etrezo d'an talvoudoù gwirder, retvez, gallusted, h.a. debarzh gant ar spered d'an diazalc'h dezgeriet dre ar barnad. Pa haerer ez eo gwir an diazalc'h e toareer ar barnad evel *assertorisch* ; pa zisklerier ez eo retvezek ez eus anv a varnad *apodiktisch* ; pa chomer hep divizout war geñver an diazalc'h ouzh ar gwirder hag ar retvez emeur dirak ur barnad *problematisch*.

Ouzh an teir furm varnad e klot tri daouad “ergrafoù glan” (Al. *reine Begriffe*), anvet *rummennoù ar vodelzh* : *gallusted* hag *angallusted*

(Al. *Möglichkeit, Unmöglichkeit*, Gl. *possibilité, impossibilité*), *revoud* hag *anrevoud* (Al. *Dasein, Nichtsein*, Gl. *existence, inexistence*), *retvez* ha *deberzh* (Al. *Notwendigkeit, Zufälligkeit*, Gl. *nécessité, contingence*).

ASSERTORISCH

Ar seurtad-mañ a varnadoù a glot o modelezh ouzh rummenn ar revoud. Barnadoù *gwir* int en devoud hep tennañ o gwirder eus ar retvez. A se e reer anezho *gwirderioù a zevoud, gwirderioù devoudel* (Gl. *vérités de fait*). Sk. : “Barzhed zo e Breizh” ; ur stad a draoù gwiriadus eo hag ar barnad zo haeradenn un devoud gwir met deberzhnek, e nep tro retvezek.

Pe gendec'her brezhonek reiñ d'an termen ? Merkomp ez eo Al. *assertorisch*, Gl. *assertorique* a un orin latin gant Gl. & Sz. *assertion* ; brasoc'h eo erdal hemañ avat pa na ziforc'h ket etre deberzh ha retvez, o talvout kement ha "diskleriañ ez eo gwir ul leksiz" (Al. *Behauptung*, Br. *haeriñ*, sl. KIS-500, La-10, p. 391 ; KIS-522, La-11, p. 95). Kinnig a ran sevel kevatal brezhonek Al. *assertorisch* dre un hent pleustret e meur a yezh, anezhañ dec'heriañ ur c'heal dre adkemer prezegad an aters graet d'e zespizañ pe d'e skoueraat, sk. : La. *quidditas*, Al. *Washeit*, Br. *pezhev* (sl. KIS-534, La-11, p. 181) ; an aters skoueraat o vezañ en degouezh-mañ : “Ha *gwir eo* ez eus barzhed e Breizh ?” e ve korvoet ar prezegad “*gwir eo*” da luniañ an adanv **gwirevek**.

APODIKTISCH

Er Brederouriezh klasel e talvez e Gr. *ajpodeiktikov*“, Gl. *apodictique*, Al. *apodiktisch* kement ha “dienaüs” (sl. KIS-405, La-09, p. 413 ; kv. ivez an arver graet er Yezhoniezh eus *deiktikov*“, KIS-440, La-10, pp. 148 hh.). KANT a ra gant an termen da adanviñ ar barnadoù a glot o modelezh ouzh rummenn ar retvez. Ne haeront

ket diazalc'hioù deberzhek evel ar barnadoù gwirevek, met diazalc'hioù retvezek. Sk. : “Sammad kornioù un tric'horn zo 180°.”

Dienadus dre ar Ventoniezh eo hevelep erganad ; o vont adarre gant an hent diagent diwar ar stumm-mañ anezhañ : “*Dien eo* ez eo 180° sammad kornioù un tric'horn” e c'hallfed luniañ an adanv **dienevek**.

PROBLEMATISCH

“Ar barnadoù **P** zo hevelep ma tarbenner ar yaiñ pe an nac'hañ evel gallus (a-did) hep mui¹.” Gant gerioù all, ez eus anezho erganadoù a c'hell bezañ gwir, a zo marteze gwir, hogen na ziviz ket an erganer war o gwirder. KANT a ro da skouer emzalc'h ar spered e-keñver al lavarennoù a ya d'ober un erganad tebadek (Al. *hypothetisch*) pe disglenadek (Al. *disjunktiv*) : “Mard eus ur reizh doueel, e vo kastizet an dud fall.” — “Dont a ra ar bed diwar an dargouezh, no diwar un arbenn diavaez, no diwar ur retvez diabarzh.” Hini ebet eus al lavarennoù, sellet a-zistag, ned eo haeret (yaet pe nac'het) : pep hini a seller evel un danvez haeradenn hepken, hep mont pelloc'h.

Da arloañ an hevelep hentenn c'herluniañ ez adskrivfed an erganad kentañ a roe KANT da skouer : “*Mard eo* gwir ez eus ur reizh doueel [...] o kinnig an adanv **mardevek**. Hiroc'h e ve an tun adskriñ evit a sell an erganad disglenadek : “*Mard eo* gwir e teu ar bed diwar un dargouezh, ne zeu ket diwar un arbenn diavaez [...]”

EVEZHIADENNOU

I. – Arzaelet e vez reizhiad kantek ar modelezhoù. Kentañ arbennadenn, en doa KANT diawelet ha dispennet en a-raok, eo bezañ dilezet ar meizadur aristotelek, a lavarer « ergorek » e kement ma ra eus ar vodelzh ur perzh enien eus an diazalc'hioù — tra m'he lak KANT da zont eus diviz an erganer. Anzav a ra ned eo ket « ergorek » er ster-se e vezadur dezhañ, nemet ez eo talvoudek neoazh evit nep meiz denel pa gemer sol war « furmoù kentouezat an anaout » a sell eñ evel dezverk an ergoregezh. An eil arbennadenn eo “ez « adsav » KANT e termenou a-benn ar fin gwerc'hadek pe « gwerc'helour » pezh na oa evit ARISTOTELES nemet deskrivadur ar prezeg drezañ e unan, peurgetket e-barzh rummenn ar vodelzh « revoud/anrevoud ». Pa spire koulz lavarout da ARISTOTELES engronnañ an diazalc'hioù « anreveziat »

¹ “Problematische Urteile sind solche, wo man das Bejahen oder Verneinen als bloß möglich (beliebig) annimmt ” (KANT, *Krit. der reinen Vern.* A. 75 ; B 100).

e-barzh an un rizh erganadoù gant an diazalc'hioù « reveziat », e tenn ar meni emrended a ro KANT d'an diazalc'h anreveziat da erlec'hiañ ouzh bevennegezh erganadus pep diazalc'h un anvevennegezh c'houbarek evodet eus ur c'hemparzhin furmel rik hag estren da « spered » ar Boelloniezh¹.”

II. – Er C'hramadeg e vez graet ivez gant an termen La. *modus* (Br. *moz*, Gl. *mode*, Al. *Modus*, *Diathese*, Sz. *mood*, *mode*, Kb. *modd*, Iw. *mód*) despizet evel an doare eus ur furm verbel o verkañ “emzalc'h an eztaoler e-keñver an argerzh” (SADED Yad-0/4 ; DOKB. p. 12). Ar *moziou* gramadeg ha *modelezhioù* poelloniel KANT n'int ket hep kerentiez : e-keñver ul leksiz e trespizer ar *vodelezh* evel emzalc'h ur spered dibarek (pe spered mab den en e “ergoregezh”) hag ar *moz* evel emzalc'h un eztaoler dibarek. E se, er frazenn : “Mard eus ur reizh doueel, e vo kastizet an dud fall” ez anavez poelloniezh KANT ar *vodelezh gallus-dic'hallus* (barnad tebadek, furm eus ar barnadoù mardevek) hag ar C'hramadeg ar *moz tebin beziadel* (SADED Yad05 ; DOKB. p. 13).

III. – Frouezhus e vez ivez keñveriañ ouzh diarsell Poelloniezh KANT un trede diarsell a zo hini Anadennoniezh HUSSERL. Hemañ, e-lec'h

“ furmoù kentouezat an anaout”, a lak e gwrizienn an anaout ar *bongrediñ* pe *bongoaliñ* (Al. *Urglaube*, *Urdoxa*), e berr : ar c'hrediñ ez eus eus ar bed. Er moned d'ar bed e wisk ar bongoaliñ modoù diseurt, ent resis e c'hoarvez gantañ tri *modekadur* (Al. *Modifikation*), ar c'hentañ e gwere an *diogeliñ-arvariñ*, an eil e gwere ar *yaiñ-nac'hañ*, an trede e gwere ar *c'hantvout-argantvout* (sl. La-01, pp. 63 hh. o terc'hel kont eus un nebeudig kemmoù graet e termenoù 'zo abaoe 1966 ; La-09, La-10, La-11 *passim*). Er chabistr “Anadennoniezh ar Poel

l

” e tenn HUSSERL korvo eus reizhiad KANT o kevenebin

“

ur gwelout a c'haller lavarout « *guirevek* », o *tougen war un dra bennak hinienne*

l

¹ “[...] KANT « rebâtît » en termes finalement pragmatiques et « réalistes » ce qui chez ARISTOTE relevait de la pure description du discours par lui-même, en particulier dans la catégorie de la modalité « existence/non-existence ». Là où ARISTOTE se contentait en quelque sorte d'englober les relations « non existantes » dans le même type d'énoncé que les relations « existantes », l'espèce d'autonomie prêtée par KANT à la relation non existante substituée à la finitude énonçable de toute relation, une infinitude abstraite issue d'une symétrie purement formelle et étrangère à l'« esprit » de la logique” (Gérard LEGRAND, in *Voc. Bordas de la Philos.* 1993, p. 220).

” ouzh “ur gwelout « *dienevek* », *gwelout kefredel ur gwevad* (Al. *Wesen*)
pe ur stad a draoù gwezadel (Al. *eidetisch*)” (*Ideen* Kevrenn 4 II § 137
[285], stouedoù ha daouankoù gant an Aozer).